

« Itron Varia Garmez »

Eus traoñ ar sal vras e savas, a-greiz-holl, hopadennoù ha strakadennoù daouarn, hag e stage an everien, dre ma skoent war an daol, war ar gwer, pe en o daouarn, da ganañ war un dro gant ar pick-up ha gant jazz ar sonerien :

Deomp holl 'ti Marijanig (div wech)
Deomp holl 'ti Marijanig vrao (vrav),
Ha ni hon bo
Un apero,
Un dijesto...

5

10

– Ur charleston ! a lavaras Paol. Deuit Jani, ma vo lakaet hoc'h eskern da zraskal.

Sevel a reas an daoliad a-bezh, nemet Joz hag e hini vihan glac'haret, hag i ha sankañ er forn gor, e brum glas ar moged.

Deomp holl 'ti Marjanig vrao.

15

– 'Ra ket kement-se chistroù ! a bedas Jani Dreo.

Ur souezh, evit gwir, penaos e c'helle Paol Tirili lakaat tro en e izili. Gwevn e-giz ur silienn, ha pa dostae un anaoudegezh bennak, da vat ivez “o hejañ he filhoù”, prim ur flac'had war he feskenn...

Un apero, un dijesto.

20

Dirollet ar saliad. Jani Dreo, bliv he lagad, a'z ae he favioù en-dro, ma tiskoueze he loeroù kas-c'hoant, evel ma lavare, betek he fennoù-daoulin.

– Me 'm eus plijadur o tañsal ganit, avat ! e tic'hwezhas. Pa davas trumm jazz ha pick-up. Ha digor o genoù gant an holl.

– Mont a ray va zi en traoñ ganeoc'h, a youc'he ur vouezh. Dilammet e oa an ostiz diouzh toull an diri, e-giz ur Jañ-Blev, hag e folle, ma ouie folliñ.

25

– Dañsit dañsoù furoc'h, tri mil c'hast ! N'omp ket tud ouez, 'mechañs !

Jañ-Mari Palud n'oa ket un ostiz drouk anezhañ. C'hoarzhin a rae, goude-se, en ur gemer ur banne gant taoliad Paol :

– Me 'soñje din e oa kouezhet ar gurun war ar “c'houi”¹ ; ken on c'hoazh strafuilhet ! — hag e tisklerie penaos e oa distaget melloù tammoù plastr diouzh ar solier war bennoù ar jostromed, er gegin.

30

– Lavar 'ta, Paol. Te ' verko din e skritur moul war un tamm kartoñs, un dra bennak e-giz-mañ :

DÉFENDU DANSER LE CHARLESTON
LA GAVOTENN ET LES DANSES QUI MET
LA MAISON A REMUER

35

– Hag e sini dindan : La direction. Neuze, difenn a rin ivez d'ar sonerien da lakaat mui an dañsoù-se, a zo mat evit ospital ar re sot... Gwelloc'h din tremen evit ur ripompi tagnous ha koll pratikoù eget gwelout va stal o freuzañ warnon. N'am eus ket ezhomm da vezañ kavet marv dindan dismantroù ar « c'houi kouzh », me... Ha da c'hortoz, kemerit pep a vanne, tudoù, war gont mestr an ti !...

40

Da c'hortoz, ivez, n'oa ket chomet ar sonerien da zic'henaouiñ, hag e oant o klask penn ouzh un tango.

Troiñ a reas Paol ouzh Mimi Andro :

¹ ar c'houi = ar c'hoc'hu

- 45 – Me ' lavar 'z eus trubuilh en ho pennig, Mimi. Na chomit ket aze 'giz un hirvoud, ha deuit da zañsal.
- Ha me ' lavar, me, a responte, dichek, ar Vigoudenn yaouank, ha me ' lavar, me, ne filin ket ganto, hag e timezin pa garin.
- Sur avat, eme Baol, pa n'oa evit ober respont all ebet. Deuit da ober an tango, da c'hortoz.
- 50 – Feiz, nann, va Doue ! N'am eus ket c'hoant.
- Ha Paol ha mont neuze da gaout Jani Dreo, bec'h warni o terc'hel kaoz ouzh kamaladed all dezhi, e toull-dor ar sal-dañs.
- Ha keit ha ma tañsent, e sanke Paol e sell don ha flour e daoulagad Jani dambleget he dargreiz war vrec'h ar paotr. Ma lavaras ar Vigoudenn yaouank a-daol-
- 55 trumm :
- Gwall sev a gavan ac'hanout ganin, Paol Tirili.
- Mousc'hoarzhin a reas egile, ha :
- Jani, me 'm eus un dra bennak da c'houlenn diganeoc'h.
- Da zimeziñ, te 've' ? M' hen dare hag...
- 60 – Gortozit, Jani ! C'hwi a blij din ho pizaj kenañ-kenañ. Ha, ma fell deoc'h, e kemerin ho penn da lakaat e koad pe e mein.
- Petra ?
- Ya ! emañ o vont da fardañ ur statu bras evit iliz Karmez : statu ar Werc'hez.
- Petra ?
- 65 – Hag e roin ho pizaj d'ar Werc'hez.
- Ar Vigoudenn a oa darbet dezhi trankañ² , hag e chomas a-sav 'kreiz ar sal ; hag hi ha distagañ a vouezh uhel :
- Eo ! da welout hag e vo graet goap ouzhin gant ar bed-holl ! Hemañ zo da stagañ, siwazh !
- 70 – N'eo ket farsal a ran Jani.
- N'eo ket farsal a ran. Ha petra c'hoazh ? Ur Mabig-Jezuz a lakai din 've' war va brec'h ?
- O, gast ! nann. Kaer din ma teuan a-benn eus ar Werc'hez hec'h-unan.
- Sabatuet e oa Jani Dreo. E strad donañ he c'halon, avat, hep gouzout dezhi, e sante e-giz un allazig o vezañ bet dibabet gant Paol Tirili ; rak e dammig brud en doa hemañ e Pont-'n-Abad evel kizeller boulomigoù, ouzhpenn ma oa dañser dilui e dreid, ha kaner par d'an eostig : ur paotr, na petra, e-giz ma plijont d'ar merc'hed.
- 75

Youenn Drezen, *Itron Varia Garmez*, Al Liamm 1977

² trankañ = mougañ

Displegadenn renet

- 1- a) E peseurt bro eus Breizh-Izel e tremen an traoù ?
b) Roit anv div gêr eus ar vro-se ? (2 boent)
- 2- Gant Youenn Drezen eo bet skrivet an destenn-mañ. Roit anv ur skrivagner all eus ar vro-se ha menegit unan eus e oberennoù da vihanañ. (1 poent)
- 3- Displegit eus peseurt bloavezhioù a zo kaoz en destenn, ha roit ar merkoù a gavit enni (meur a elfenn). (2 boent)
- 4- Meur a dudenn a zo en istor :
a) Piv int ? Roit o anvioù ha lavarit petra ouzit diwar o fenn ha displegit peseurt darempredoù a zo etrezo. (4 foent)
- 5- Daoudek eo personelezh Paol Tirilli, an dudenn bennañ : ar merc'hetaer hag an arzour hegreidik. Taolennit anezhañ. (2 boent)
- 6- Petra soñjit diwar-benn ar skritell a fell d'an ostiz lakaat ouzh moger ar "c'houi" ? (1 poent)
- 7- Peseurt implij a c'hellfec'h ober eus ar pennad-mañ gant ur c'hlasad divyezhek ?
 - a. E peseurt kelc'hiad ?
 - b. Gant peseurt pal ?
 - c. Daoust ha kempennet (krennet,eeunaet,...) e vefe ganeoc'h en aviz e ginnig d'ar skolidi ? (3 foent)
- 7-Troidigezh : adalek « Eus traoñ ar sal vras... » (linenn 1) betek « ... er gegin. » (linenn 30) (5 poent)